



SKOAZELL KEAV 2023

Gouzout a reomp ne zesker ket ur yezh dre heuliañ kentelioù nemetken, hag e ranker lakaat anezhi da vevañ er-maez eus metoù ar Skol-Veur, pe ar greizenn stummañ. Gouzout a reomp ivez pegen talvoudus eo evit ar gelennerien brezhoneg kenderc'hel ingal da studiañ ar yezh, dre heuliañ devezhioù-studi ha stajoù hiroc'h lec'h ma c'hellont gwellaat o barregzhioù, ober anaoudegezh gant brezhonegerien all, divizout war o micher, o skiant-prenet, bevañ ur sizhunvezh pe ouzhpenn e brezhoneg penn-da-benn. Ken gwir all eo evit an holl re a vez o labourat e bed ar skolioù, kasourien, ATSEMed, AESHed...

Evit skoazellañ studierien Master 1 ha 2 ar c'helenn divyezhek en o studioù, ar gelennerien, ar gasourien, an ATSEMed, an AESHed, ha kement hini o labourat e metoù ar c'helenn divyezhek eo prest KEAV d'ober dezho un distaol a 50 euro war briz ar sizhunvezh staj heuliet e KEAV war o amzer vak ha war o c'houst.

Neuze :

- studierien M1 hag Aotreegezh war ar brezhoneg, ATSEMed: 300-50=250 €
- kelennerien brezhoneg ha Master 2 war ar brezhoneg ha tud all o labourat e metoù ar c'helenn brezhoneg 350-50=300€

Evit ma c'hellfemp heuliañ gwelloc'h ar goulennoù skoazell, e c'houlennomp diganeoc'h leuniañ al lodenn amañ dindan.

Da gas da : keav@keav.bzh

Anv Anv-bihan

Chomlec'h

Kod-post Kêr

Pellgomz

Postel/lekpoz.....

Anv ha chomlec'h ar skol m'emaoc'h o labourat

Anv ha chomlec'h ar skol-stummañ m'emaoc'h o studiañ

STATUD

Kentañ derez Eil derez

Kelenner ar skolioù Kelenner eil derez Gwazour tiriadel Kasour

Publik Katolik Diwan Un aozadur all (resisaat :)